

Clemvan Mignonez Renod d' Ast.

(479)

Var an ton gallec : comment goûter quelque repas?

Me ne gavan get ar repos,
 Rac mañcout a ra din va c'hourach;
 Ha va c'halon quèz en em zoulach,
 O sonjal em psan deiz ha noz.
 Siouas din, en creiz va yaouanqis,
 En oad ar blijadurezon,
 Va c'halon a losq hirvoudou;
 Da bezzec vloaz va mam a gollis. (bis.)

Un den yaouanq, dre amitie,
 A bartaje va foan angenius;
 Mes, allas! ur gombat maleurus
 A eure dezàn coll e vue.
 Beuzet on en eur môr a c'hlaç'har,
 Goude qement a valeurion,
 Me ne ran nemet scuill daëlon
 Qeita ma chommin var an douar. (bis.) (480)

Eur c'hlevet en devoa troublet
 Va speret ha va ententamant;
 Mes ur personach meurbed savant
 Ar vuez din prest neus rentet.
 Perac, Maro criç ha direzon,
 Oude het chommet hep da dam?....
 Me a varvo a neverz flam,
 Pa revân goude va gouir vignon. (bis.)

(Vol. II, p. 479-480)
 3 str. numérotées.)